

KIS-370 – Gl. infarctus

(GE – 06 11 89)

MELLADOÙ EUS AN DANVEZ GERIADUR AR VEZEKNIEZH

Gl. infarctissement. Br. amfuiñ.

Gwadliñv lec'hiek en un organ da heul stankadur ur wazhienn. Komz a reer a annon amfuiñ, amfuad, tachad amfuet.

Gl. infarctus Br. angwazhiad g.-où, infarkt g.-où.

Deskrivet evit ar wech kentañ gant Laennec, e voe an anaf-mañ termenet evel un ensilad gwad lec'hiek en ur flugezenn. Da heul emdroadur an ardarzhouriezh e termener hiziv an anaf evel un tachad kantet marvenn heskwadek (gant pe hep ensiladur gwad) devoudet gant stankadur un dalmerenn en un organ. Kemm a lakaer etre an **angwazhiadoù gwenn** (angwazhiad amwadek pe heskwadek, evel angwazhiad al lounezh) hag an **angwazhiadoù ruz** (angwazhiad orc'hadek pe gwadliñvek, evel angwazhiad ar skevent).

Gl. infarctus du myocarde. Br. angwazhiad ar c'haer kalon.

Naoued ar speurenn galon, heskwadien, o c'hoarvezout eus marvenn ar c'haer kalon ha, da c'houde, skleroz.

Gl. infarctus méésentérique. Br. angwazhiad ar gandedenn, azoniad heskwadel ar pervez.

Azoniad kof lemm diwar skorted trumm an amred gwad e tachenn uhelañ ar gandedenn (enfroù pe dromboz) o tiso'h gant amfuadur un tamm bras pe vrasoc'h eus speurenn ar pervez hag ar gandedenn geñverek.

Gl. infarctus pulmonaire. Br. angwazhiad ar skevent.

Annon amfuadur gwadliñvek er skevent, o tec'han marvennad pe o steuziañ hervez an dro, devoudet peurliesañ gant stankadur un dalmerenn dre enfroù peurgetket.

GERVA BREZHONEK-GALLEK

amwadek aa. anémique.
annon g. *amfuiñ* foyer d'infarcissement.
ardarzhouriezh b. pathogénie.
azoniad g. *kof lemm* syndrome abdominal aigu.
enfrou g. embolie.
ensilad g. *gwad* infiltration sanguine.
gwadliñv g. hémorragie.
gwadliñvek aa. hémorragique.
heskwad g. ischémie.
heskwadek aa. ischémique.
heskwadel aa. ischémique.
heskwadien aa. d'origine ischémique.
kaher g. *kalon* myocarde.
kantet aao. circonscrit.
marvenn b. nécrose.
marvennad g. nécrose.
naoued g. atteinte organique, affection lésionnelle.
orc'hadek aa. apoplectique.